



Son an teodou fall

I
Selaouit, potred a merc'het
A klevit oll ar wrionez
An teodou fall d'eoc'h vo kanet.

II
C'houi peuz dija klevet ano
Diwar ben teodou fall ar vro
Piou n'eo ket bet c'hoaz louzet
Gant en teod louz a miliget.

III
Pa vez gwelet en den iaouank
O pourmen gant er plac'hig koant
An teodou louz a ia en dro
N'or gwest da viret anezo.

IV
Er poull pa vezon o woalc'hi
An eil e ben o koumeri
A ze vez klevet an teodou
A geier leiz o ginou.

V
Pa vezon er foar, er marc'had
Atao, atao o klask goapad
An eil e ben o lavaret
Er bern trouz diwar ar botred.

VI
Soazik zo 'vont da zimezi-
Perrik ive ia gant Mari
Klevet e vez an teodou jalous
E trezo klask lakat an trouz.

VII
Ped n'in ket c'hoaz fortuniet
An teodou fall o d'euz miret
Dioustu, kerken ar goulennoù
Er bern geier diouz o ginou.

VIII
Potred iaouank selaouit ta
A c'houi merc'het ia memez tra
Kassit da bourmen anezo
O ia pell bras diwar o tro.

IX
Neuze en dervez a tenuio
C'houi assemblez a zimezo
En em garit ia gant joa
An teod fall c'hellou netra.

X
Bezit eurus da virviken
Kassit anezo da bourmen
Falloc'h 'vit ar boum atomik
Ez eo teod fall Zoaz pe Dinik.

XI
Araok echui ar janson
Me lavaro a greiz kalon
An teodou fall viche klevet
Dirak an oll viche krouget.

XII
En ifern e touesk an diaoulou
E vo kasset an oll teodou
E kreiz an tan e vo grillet
Kement teod fall a zo er bed.